

276

Chanson.

(472, suite)

Pel zo demeus a amzer e meus grêt ar sermant
 Da garout ur femelen dre un amour constant:
 Me bromet d'e c'hoantiri, en despet d'am souffrang,
 Dompti e ingrateri dre va ferserang.

(473)

D'an desertjou soliter e zân d'en em bourmen,
 O sonjal cavet remet, da vellat ous an drein
 Zo o piqat va c'halon evel ur pellicant
 A deu da gaout e bonsin flemmet gant ur serpent.

Na ignor get ar zephir, genebeut ar verelaouen
 E rân bemdez; mil soupir pa ro e sclerijen;
 Pa zeuân da huanadi, e rân evel ar cygn,
 En em laqa da gana pa dosta deus e fin.

Ar portret a garante a zo en mil andret,
 Betec var groc'hen ar goez e zeo memeus gravet.
 Ur phenix e creiz an tân, dre ardeur Appollon,
 Pe ur C'hupidon brian o tardi ar galon.

Disclerjuit ar virionez, Rouanez ar c'hoajou,
 Ha c'houi, Phebus, prinç an deiz; pequemant a zaelou
 A red evel diou zourcen demeus va daoulagad,
 Abalamour d'eur femelen zo en andret ingrat.

(474)

Caer hoc'h eus dre ho studi, eme ar Berjeren,
 Fallout rêi din da gredi e ven-me deut a ben
 Da gaptira ho calon, d'an draze me repliq
 Na neo nemet ur figur demeus ho rhetorig.

Lealdet-ur protestant, pini en eul lectur

A zo bepret variant evel eul lestr hep stur,
 A dro gant peb seurt avel hep ober resistans:
 Letu eno ar model demeus hoc'h inconstans.

Ne zeus nac operatour, na medecin ar bed
 A reparfe ar honor d'eur plac'h a ve fayed:
 Pa ve achapet an éon e vezer diverzad
 Da zzerri dor ar gaoued erit en evessat.

(475) Imita ar merc'het fur eo va intantion,
 A berz ra ar scritur qellies mantion,
 Evel ur Judith charmant, Rebecca pe Rachel,
 Pe ar Guerc'heset santel demeus an Ariel.

Seblant zo oc'h eus lennet Ovid eus a Naazon,
 A bini oc'h eus tennet meur a gomparièson,
 Pere a zo en uzach en hoc'h antretion:
 Adieu, courtesan volach; bonheur da virriqen.

Allas! Nymphes, mar deut d'am dilezel,
 E tiverrèi va buerz, evel an durzunel:
 Onnes a zo he natur, pa ve collet he far,
 Ne deus mui a blijadur pelloc'h var an douar.

(Vol. II, p. 472 - 475.)
 11 str. numérotées.)